

*par l'abbé
Léon, & Reyben.*

D'hon Eskob mad, an Aotrou DUPARK

Diskan :

Breiziz Are, Breiziz Arvor !
Spered sentuz, kalon digor,
Lavaromp hirio à bouez penn :
« *Meulet vo Jezuz* da viken » !

C'houi, Eskob santel, ra vezot ive meulet !
Setu d'ho tiambroug Breiz-Izel diredet ;
Breiz, touomp d'hon tad gant hon ene a bez
« Pennou kaler ma 'z omp » lealded, karantez.

Tra ma savo bruk ruz etouez bleun aour al lan,
War lein Sant-Mikel, Mene-Hom, Karreg-an-Tan ;
Tra ma vezo klevet peden gaer an eostik,
Trouz pounner ar steriou ha mouskan ar wazik ;

Tra ma vo e Morgat, Rosko ha Beg-ar-Raz
Kizellet ar reier gant tarsiou ar mor braz ;
Tra ma iudo mouez hirvouduz an avelou
Dre 'n ivin, an dero, e koat koz ar C'hrannou ;

Tra ma vo en o za war o chapelou kaer
Touriou dantelezet Pont-e-Kroaz ha Kreiz-Ker ;
Tra ma redo an dud diarc'hen ha gant prez
D'ar Rumengol, d'ar Folgoat, d'ar C'hastel-Nevez ;

Ken vo an heol skeduz euz e hent divuntet,
Hag euz bolz an Envou ar stered diskaret,
Kerne, Leon ha Treger, daoust d'ar falz lezennou,
Dirak ar Groaz bepred a stouo o fennou.

Breiz-Izel, a viskoaz krenv ha stard en he feiz
Ha tan ar garantez o virvi en he c'hreiz,
'Vit difen gwir Doue beteg pred ar maro,
« Gournadec'h » leshanvet, « Gournadec'h » a joumo...

Tra ma lezint frank ha digabestr hor gwiriou,
Ni vo « *Denved* » sentuz evel hor c'hentadou,
Ma o zagont avad, « *Leon* » ni a zraillo
Enebourien hor yez, hon Doue hag hor Bro...

Setu mennoz Breiziz Are, Breiziz Arvor :
— Hel lennit, o Tad. en o c'halon frank digor —
« Meuleudi da Jezuz, meuleudi da viken ! »
« Ha d'hon Eskob karet buez hir ha laouen ! ».